


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 14 - C'hwevrer 1968

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Petra eo ar framm ?	p. 33
Ar c'hêriekaat	p. 43
Notennoù armerzhel (12), an armerzhioù kengladel, II. Kudennoù pleustrek. Adreizhadurioù	p. 50

PETRA EO AR FRAMM ?

Bemdez e klev an danvez emsaver anv eus "ar framm", eus "bezañ er framm", eus "an Emsav frammet". N'eo ket ar framm tra dianav dezhañ. Dre e labour e pren tamm-ha-tamm bemdez ar skiant anezhañ. Un anaoudegezh korfel eo ar skiant-se avat, ha dav eo he c'hlokaat dre un anaoudegezh emouiziek, meizel ha speredel war un dro.

Termenadur.

Setu a lavar Dafar 64 (1) :

framm g., 1) strollad pezhioù kempennet diouzh un urzh pe ur gefridi, sk.: framm un doenn 2) doare ma'z eo kempennet pezhioù ur framm er ster 1, sk.: framm ar volekulenn hidrogen 3) ar c'hempenn a zo etre parzhioù ur framm er ster 1 kemeret evel sellad distag, sk.: ar frammoù kerentiadel.

E gwir, stag-tre e chom an tri ster, frouezh ma'z int eus tri c'hammed eus ar sellout : 1) ar framm evel tra fetis 2) ar framm evel furm an dra fetis-se (danvez merzout) 3) ar framm evel poell ar furm-se (danvez meizañ). En displegadenn da heul e venegimp dreist-holl ar sterioù 1 ha 3 hag e raimp neuze gant an termenoù : framm fetis, ha poellframm evit o envel.

X Ar framm ha furmekadur al labour

Pa vez un niver a dud o kenlabourat a-benn diraez ur pal pe seveniñ ur gefridi, e rankont diazezañ un urzh en o c'henlabour. Hentoù diseurt ez eus avat evit tizhout an urzh-se : pe he c'halfichat evel ma teu e teu war an dachenn diouzh ma vez ret, pe neuze he savelañ evel ur reizhiad kempoell ma ne vez lezet netra hep un arbenn resis da vezañ. Anat eo ne c'haller komz eus framm nemet en eil degouezh-mañ. Un aozadur-labour ne vez graet anezhañ ur framm nemet mar ro kement a bouez d'an daou amkan : diraez an disoc'hoù merket dezhañ, bezañ frammet kempoell.

War veur a dachenn e vez kempoellet al labour. Meur a urzh ez eus da ziazezañ :

- un urzh etre an amkanioù; un heuliad pazennoù a verker d'an erounit, pep hini o vezañ un amkan da dizhout war-lerc'h e amezeg-kent hag a-raok e amezeg da heul. An treug a reer eus an tremen dre an heuliad amkanioù-se;

- un urzh etre ar gwazadoù; ar gwazadoù a hevelep natur a stroll-er e rummoù, hag ar rummoù-se a roer da erounit da skourroù obererezh arbennik; termenet e vez pep gwazad en e vunudoù ha, da heul, e spisaer en e vunudoù, e skoueriekaer, labour pep skourr obererezh;

- un urzh etre ar wazourion (2); e pep gwazour e vez fiziet ur gourc'hwel en ur skourr obererezh, ouzh e lakaat kret evit erounezadur un niver gwazadoù;

- un urzh en arc'hwel, oc'h unaniñ an teir all; e-ser pep amkan en devez pep gwazour un niver a wazadoù da erounit; ar gwazadoù-se, an doare ma rankont bezañ kenaozet, an darempredoù a ampegont etre ar skourroù, a c'houlenn un urzh termenet dik ivez en egor hag en amzer.

Ar peder urzh-se n'int ket distag pep hini diouzh ar re all; pevar arvez int eus an hevelep hollenn (3) a zo e gwir ar poellframm. Kement stroll labour m'o c'haver a zleer ober ur framm anezhañ.

Ur stroll labour nann frammet a dremen gant merkañ ur pal d'e obererezh, gant termenañ an disoc'hoù, dieub dezhañ d'o diraez evel ma kar. Ur stroll frammet a rank ouzhpenn merkañ strizh e furm da gement labour treugel a zo da erounit adalek an derou betek an diwezh. E-se, ez eo ar framm ur furmekadur eus al labour.

Ar framm hag hollekadur ar seveniñ

Sellomp ouzn ar perzh-mañ eus pep labour a zo bastañ d'un ezhomm. Sevel a reer hentoù evit bastañ d'an ezhomm kehentiñ. Aozañ a reer devezhioù-studi evit bastañ d'an ezhomm a zo da stummañ emsaverion.

Adalek ar mare ma vez skoueriekaet ul labour, - ma vez roet ur furm genurzhiiek d'an aozadur-erounit anezhañ, ma vez savelet er meiz, ha war ar paper, poellframm an aozadur-se (lavarout a reer c'hoazh e vez poellsavelet ar framm), - e tiraezer ur varregezh nevez. Rak an aozadur frammet ne dalvez ket hepken da vastañ d'an ezhomm dibarel a zo en e geñver, hogen dedalvezet e c'hell bezañ e boellframm evit bastañ da gement ezhomm heñvel a zo en hevelep mare hag en dazont.

Ur greizenn-skoliañ nann frammet a c'hello kaout skolidi e-leizh, hogen ne vo kreizenn all ebet evit diwanañ diouti; pa'z ay da get, e vo da adober diwar netra al labour da sevel ur greizenn nevez. En enep, ur greizenn-skoliañ frammet, ouzhpenn seveniñ he c'hefridi, a vo ur greizenn a greizennoù : diwar he foellframm e vo diorreet kreizennoù all heñvel outi e kement lec'h hag e kement mare ma'n em gavo un ezhomm heñvel ouzh an hini ma vast dezhañ. Un aozadur frammet zo enta dezhañ, ouzhpenn e varregezh erounit, - e arbenn da vezañ, - ur "varregezh-ouennañ" o teverañ eus ar perzh bezañ furm hollek a zo gant ar poellframmoù.

Notomp an dra-mañ : da gentañ ned eo ar poellframm nemet un doare difetis da sellout ouzh ar framm; en un eil prantad e teu da vezañ ur benveg urzhiaataerezh e diabarzh ar framm fetis; en un trede prantad, e c'haller e "zispegañ" diouzh ar framm fetis hag e gemer evit ul labour nevez disheñvel diouzh labour ar framm fetis e-unan.

Ar framm hag ergoreladur an ezhommoù

Aes eo komz eus un ezhomm ur wech ma'z eo anavezet. Aes eo zoken peurliesañ bastañ d'un ezhomm p'en anavezer. An diaez avat eo anaout ha termenañ un ezhomm.

Evit ar re a wel ar bed ken eeun hag o spered, a glever o prezegenniñ war ar pezh a venn kaout ar bobl vrezhon, e tleomp reiñ diskleriadurioù.

Anat eo d'an holl emañ pobl Vreizh en ur stad kriz a ezhomm; ur buhezad feuls eo an ezhommelezh-se. Met en enep d'ar pobloù a glot o Stad politikel ouzh o ezhommelezh, hag a vast ar Stad-

*substantive
fuelle*

se d'o ezhommelezh hag a ro un termenadur dezhi, ne gav ket pobl Vreizh bastadur d'hec'h ezhommoù er Stad politikel m'emañ sterniet. Dre-se n'o anavez ket; un anaoudegezh dangorel o deus Breizhiz eus o ezhommelezh gouzañvet evel un diaez hep dremm. Ezhomm eus petra ? N'int ket evit henn lavarout fraezh. Ul lusk d'an ober eo, met d'ober petra ?

E par ar vuhez fetis e vez an ezhomm gouzañvet kent bezañ anavezet ar pezh en gwalc'ho. D'ar muiañ ez eus anezhañ ul lusk d'an ober na zoug avat meneg spis ebet eus e zorc'hadur. Tu ez eus da lavarout ez eo dre zegouezh e tizolo an ezhommeg anv e ezhomm : pa c'hoarvez dezhañ e walc'hañ ez anavez ster ar goulenn ez eo; dre vuhezañ ar gwalc'hadur eo e tro an anaoudegezh dangorel anezhañ en un anaoudegezh ergorel.

A-hend-all, an ezhomm e-unan, sellet evel ul lusk eus ar vuhez, zo atav mui pe vui forc'hellek : evit terriñ d'un ezhomm e kaver bepred meur a zanvez gwalc'hañ. Lavarout a reer ez eo an ezhomm un durc'hadur mui pe vui digor, seul zigoroc'h ma tremener eus par an ezhommoù bevedel da bar an ezhommoù buhezel. Ar sec'hed da skouer zo dezhañ un durc'hadur strizh a-walc'h; an ezhomm-lenn, en enep, un durc'hadur digor kenan. Zoken an ezhommoù bevedel avat a c'haller terriñ dezho dre zanvezioù gwalc'hañ pell diouzh ar re voas : gwalc'hañ a reer an naon dre vutuniñ.

Arabat krediñ koulskoude ez eus ur par da dizhout ma c'haller gwalc'hañ forzh petore ezhomm gant forzh petore danvez. Lakaat termen d'un ezhomm ned eo nepred prouiñ ez eo kavet an danvez gwalc'hañ reizh. Terriñ d'un ezhomm n'eo ket dre ret bastañ dezhañ. "Krouiñ ezhommoù nevez", hervez troienn ar vruderion genwerzh, zo alies kevatal da "touellañ an ezhommoù", gwariañ o ergoreladur. Gouest eo ar gwin da derriñ d'un ezhomm, ha d'un ezhomm speredel; hag-eñ e c'haller lavarout e vast d'an ezhomm-se ?

*mañ
gouzañvet*

Penaos neuze anaout ez eo reizh gwalc'hadur un ezhomm ha, da heul, an anv roet dezhañ, an ergoreladur anezhañ ? Dre ensellout un degouezh dibar, distag, ne c'haller nepred. Ne c'hell ar gwalc'hadur-se eus un ezhomm dibar, an ergoreladur darnel-se eus an ezhommelezh, kavout o reizh nemet ur wech lakaet e kelc'h klok an ezhommelezh ergorelaet.

chomp

Aze e kouezher gant un diaester heñvel a-walc'h ouzh ur c'helc'h bac'h : pep ezhomm ne gavo e zremm reizh nemet e-kreiz an holl ezhommoù all kavet ganto o dremm reizh. Ret-mat eo savelañ ur reizhiad kempoell a ezhommoù ergorel (diwar maeziad an ezhommelezh dangorel), a-benn reiñ o eztaol hag o ster reizh da ezhommoù ar vro. Ar gudenn eo penaos savelañ ar reizhiad-se.

Uheloc'h hon eus gwelet e lakaer, dre frammañ al labour, da ziwanañ e diazez an aozadur-erounit ur poellframm a c'hell bezañ embreget evel benveg distag. Pep labour, e kement ha ma'z eo bastadur d'un ezhomm, zo da heul ergoreladur un ezhomm. Dre-se e rankomp lakaat

afutur, p...
ez eo ar poellframm ur benveg azas evit oberata an urzhiadur a-zremm etre an ezhommoù ergorel.

Sellomp a-dostoc'h. Ar pezh a anvomp amañ, diouzh ur savboent oberatael rik, reizhiad kempoell an ezhommoù ergorel n'eo nemet un anv all eus ar pezh a anvomp ivez ar sevenadur. Ar sevenadur zo an doare ma vast ur bobl da ezhommelezh mab-den, dre-se ar furn ergorel a ro d'an ezhommelezh-se dre vastañ dezhi.

An obererezh frammañ zo dezhañ ur roll urzhiadur a-zremm; drezañ e vez furmekaet hag hollekaet korf ar sevenadur; heñchañ a ra ergoreladur an ezhommoù dangorel hag o lakaat da gavout o lec'h er sevenadur. An hent a-zerc'h avat n'eo ket e hini. Den ne c'hell krouiñ an ezhommoù dangorel; aze emañ neved mab-den, lec'h an andonioù speredel. Heñveldra, den ne c'hell disiellañ evit un all an andonioù-se : den ne c'hell ober evit unan all e sevenadur, da lavarout eo ergorelaat e ezhommoù; aze emañ rezid mab-den. Ur roll erounit en deus ar framm er sevenadur; ur gwazadur n'eo ken : e gwazoniezh emañ d' an dibaboù-diazez graet gant pep hini oc'h embreger e rezid.

*Swagant
da
afutur
da*
Amañ ez adkaver an enebadur hon eus merket e lec'h all etre ar galloud politikel hag an aotrouniezh speredel (4). An hevelep enebadur a c'haller adkavout etre ar gwazour, den ar framm, an erounit, an hent a-zremm, den ar redi; hag ar c'heodedour, den ar geoded, ar seveniñ, an hent a-zerc'h, den en e rezid.

Penaos e tiwan ar framm.

Betek-henn hon eus komzet eus ar framm evel framm diazezet endeo. Dav eo ensellout argerzh e c'hanedigezh. Daou geal a rankomp degas amañ : hini an diougan ha hini al lamm.

Arverañ a reomp amañ a-ratozh ar ger "diougan" evit menegiñ nep reizhiad raktreset e stumm lavar e-keñver ezhommelezh ur bobl. Ur ergoreladur eo ivez, eus ur seurt all, - n'emañ ket amañ al lec'h d'e zeskrivañ. Lavaromp hepken ez eus anezhañ ur rakframm, kentañ moul eus ar reizhiad kempoell a ezhommoù ergorel. Ar rakframm a anav-

ezomp-ni eo hini ar Stad Vrezhon evel ma'z eo bet raktreset gant "diouganerion" an Emsav. Stignet emañ ar rakframm-se a-dal da vaeziad an ezhommelezh dangorel vrezhon. E berzh kentañ eo bezañ kevastenn d'ar maeziad ezhommelezh-se : e c'holeiñ a ra en e bezh. Ur rakframm lavar n'eo ken avat, ha dioutañ e-unan n'en deus gwerc'h-ergorelaat (5) ebet : ar gelennadurezh war ar Stad Vrezhon n'eo ket ar Stad Vrezhon ha pa ve anavezet gant an holl e Breizh.

Pelloc'h e welimp e kresk ar framm fetis a-lammoù. E c'hanedigezh ivez a c'hoarvez eus ul lamm. En ur poent eus ar maeziad ezhommelezh e tiwan un embregadur-bastañ, a c'haller meizañ evel ur fetisadur en ur poent eus ar rakframm a en em zalc'h a-dal d'ar maeziad-se. Eeun e hañval bezañ an argerzh; n'eo ket kement ha ma hañval bezañ, pa ouzer e teraouer anaout un ezhomm d'an ampoent hepken ma teraouer bastañ dezhañ, - dre grouiñ an embregadur-bastañ ha n'eo ket a-raok. Ar re a studi istor S.A.D.E.D. a verz n'eo bet termenet an ezhommoù ma vast dezho ar Strollad nemet tamm-ha-tamm a-hed ar bloavezhioù. Ul lamm eo bepred an tremen eus ar par dangorel d'ar par ergorel : n'eus hent ebet raktreset na raktresadus o vont eus an eil d'egile. Ha pep embregadur-bastañ zo, en e boent-derou, ul lamm en dianav : al lamm-se eo a ro d'an ezhommdangorel e zremm ergorel, a oa dianav betek neuze. Un ober a rezid eo al lamm-se.

Adalek ar mare m'emañ seurt embregadur-bastañ evel ur poent fetis er rakframm, ez en em gav ar rakframm kreizennet gantañ. An hentoù amañ zo tresadus, hag a zle bezañ treset spis.

Penaos e kresk ar framm.

Ur wech azezet an embregadur-bastañ, e tigor prantad ar frammañ e-unan. Furmekaet e vez al labour, hollekaet e vez an obererezh, hag e-se savelet ar poellframm. Evel m'hon eus gwelet, ar poellframm, benveg ret d'ar furmekaet ha d'an hollekaet, a c'hell talvezout da emelloù all. E emell bras a vo "skarvañ" ar framm fetis ouzh ar rakframm. A-unan emañ gant ar framm fetis peogwir ez eo ar poell

anezhañ; a-anien emañ gant ar rakframm peogwir ez eo eveltañ un danvez reiz ha pa c'hell bezañ lakaet e stumm lavar.

Diwar an ampoent ma'z eo oberataet ar skarvadur ez emdro en ur ser ar framm fetis darnel hag ar rakframm hollel; en ur ser met pep hini en e zoare. Diforc'hañ a c'haller o daou zoare-embreiñ evel-henn :

- ar framm fetis a gresk dre emastenn,
- ar rakframm a gresk dre stankaat.

Ar framm fetis a gresk dre emastenn

Ne fell ket dimp komz amañ eus an doare emastenn a c'hoarvez gant hollekaat ar framm fetis : anezhañ krouiñ kreizennoù nevez en egor douaroniezhel a-benn bastañ d'an hevelep ezhomm e kement lec'h m'en em gav; met eus an emastenn war ar rakframm a-dal da vaeziad an ezhommelezh : dre ma c'hoarvez da ezhommoù nevez bezañ ergorelaet, e kresk an tared dindan framm fetis.

Aze e sav ur gudenn. Dav eo d'ar framm fetis evel just derc'hel d'e amkan pennañ : arc'hwelañ (6); ma'z eo ar framm er c'heñver-se ar c'hempenn gwellañ evit tizhout an askorad uhelañ. Ar perzh pouezusañ ampleget gant an amkan-se avat eo ar stabilded. Diverzout a reomp diouzhtu an dael o ren etre an daou redi m'emañ ar framm fetis : bezañ stabil a-benn reiñ tu d'al labour, bezañ war emdro a-benn heuliañ ar rakframm. Kreskiñ a-lammoù a rank neuze ar framm fetis ober.

Mar enseller bremañ gwikefre e greskidigezh e tistranner meur a elfenn o kemer perzh enni :

- bount an engresk arc'hwel; dre arc'hwelañ e teu gant ar framm kenderc'hadoù a rank kavout lec'h, dreistadoù a zo da bostañ. Un aozadur-stummañ, da skouer, a vo evit reiñ gourc'hwel d'an dud en devo stummet, met betek ur poent. En tu all d'ar poent-se ec'h en em zaspugno ur "c'hevala stummadur" o c'houlenn bezañ postet;

- ergoreladur ezhommoù nevez; amañ emañ e gwir ar c'hentarbenn

eus emastenn ar framm. Lakaomp e ve staget gant ul labour emsavel nevez, eleze e ve dizoloet un doare nevez da vastañ da ezhommelezh ar vroad, a lavarer c'hoazh : ergorelaet un ezhomm nevez er-maez eus an taread dalc'het gant ar framm fetis. Postet e vez en aozadur nevez lod eus ar c'hevalaoù danzeet gant ar framm fetis, - gwazourion stummet, stlennadoù, aveadurioù, h.a.. Bennozhañ d'ar c'hevalaoù-se ez eo buanaet diazezidigezh ha frammidigezh an embregadur-bastañ nevez. Hogen ent-furmel n'eo ket disheñvel an argerzh, hag an hevelep kudennoù zo da ziskoulmañ : an ezhomm war ergorelaet a rank bezañ dirdermenet tamm-ha-tamm a-dreuz tennadoù darnodadennek (7) a zo re azvidigezh ar framm; savelet e rank bezañ ar poellframm nevez ha skarvet ouzh ar rakframm da bep kammed;

- kevanadur ar framm fetis; pal ar frammañ eo leugnidigezh ar rakframm gant ur framm fetis unvan, aet kevastenn enta da holl vaeziad an ezhommelezh, oc'h amparañ ar reizhiad kempoell a ezhommoù ergorel, - hag o vastañ dezhi. Pe, o tedalvezañ da Vreizh, astennidigezh framm an Emsav da holl vuhez ar vroad, dre-se kendegouezhidigezh an Emsav gant e bal hag e dermen, ar Stad.

Ar gudenn a sav amañ eo hini ar gougevaniñ (8), da lavarout eo unaniñ ar frammoù darnel distag diwanet e poentoù disheñvel eus ar rakframm, amparañ un ereadur frammel fetis e-lec'h ma oa da gentañ un ere rakframmel. Pa ne c'haller ket amañ pleustriñ dre ar munud war holl vodelezhioù ar gougevaniñ, e tremenimp gant un nebeut evezhiadennoù :

- pennamkan ar gougevaniñ zo kevanaat ar framm; dre-se ez eo ar rakframm ar steuenn oberatael anezhañ;

Lakaomp e ve kavet daou zoare disheñvel A ha B evit gougevaniñ daou framm darnel, A o vezañ reishoc'h eget B e-keñver ar rakframm, B o vezañ spletusoc'h eget A e-keñver askorad al labour; an hent A eo a vefe dibabet, an amkan rakframmel o vezañ trec'h war nep amkan all.

- ar framm nevez ned eo ket dre ret sammad eeun ar frammoù gougevanet outañ; amparet e vez e boellframm diwar ar poellframmoù darnel,

ar re-mañ o vezañ diouzh ret treuzfurmet don dre arbennoù diseurt, o tennañ da skouer da ziogeladur arc'hwelioù ar frammoù gougevanet, da gempoelladur ar framm nevez, d'e skarvadur ouzh ar rakframm;

- gant ar gougevaniñ e vez kaset war-raok ergoreladur an ezhommoù a vast dezho an aozadurioù gougevanet. Gant S.A.D.E.D. ez eus ur skouer splann : keit ha ma chomas dizalc'h e venne bastañ d'un ezhomm a skoliata brezhonek; ur wech gougevanet ouzh ur framm politikel, e vast d'an ezhomm a stummañ emsaverion.

Emdro an aozadurioù-deskadurezh frammet a zeu aesoc'h da veizañ p'en displeger gant termenoù frammet. Da gentañ e stummas S.A.D.E.D. gwazourion evitañ e-unan. Ur mare a zeuas ma stagas ar "c'hevala stummadur"-se da yoc'hiñ er Strollad. Er mare-se e tiwanas Kelc'h Debauvais oc'h ergorelaat un ezhomm a stummadur brezhon kentañ derez. Postet e voe ennañ ar c'hevalaoù daspugnet gant S.A.D.E.D.. Frammet e voe an aozadur nevez ha skarvet e framm ouzh ar rakframm, evel ma oa ivez araozañ framm S.A.D.E.D.. Diwar boellframmoù an daou aozadur hag aozadurioù all diwanet e-keit-se e voe diazezet Skourr an Deskadurezh o terc'hel war ar rakframm taread Maodiernezh an Deskadurezh Vroadel. Er framm fetis nevez-se emañ bremañ an daou aozadur, en ur stumm gougevanat, hag azveret don a-walc'h o foellframmoù.

Aes eo kompren ivez ne c'hell ur framm fetis anaout nemet an embregadurioù diwanet en hevelep rakframm hag eñ. Un niver a dud ne gomprenent ket perak e roe S.A.D.E.D. en e afer gant K.A.B. kement a bouez d'an amkanioù pellañ, ha perak e rae adalek bremañ eus an dibab etre Stad Vrezhon ha Stad C'hall ar poent-krennañ evit dazont e zarempredoù gant ar C'huzul. Ne oa ket hepken ur "gudenn a vennozioù", met ur gudenn a gorfoù. Ar rakframm o vezañ steuenn oberatael ar frammoù fetis darnel, ne c'hell ar re-mañ kemer perzh e nep ober na anavez ket an hevelep amkanioù rakframmet hag int.

Ar rakframm a gresk dre stankaat

Ar rakframm, ganet gant ar pezh hon eus anvet an "diouganerezh" evit enebañ e orin lavarel ouzh orin oberatael ar poellframm, ned eo ket ul lun diflach. Emdreiñ a ra kement hag ar poellframmoù. E roll eo bezañ ar steuenn o sturiant diwan ha kresk ar frammoù fetis, hag outañ e vez skarvet dibaouez ar frammoù fetis. Dre-se, bep ma emastenn ar framm fetis e teu spisoc'h ha stankoc'h tresoù ar rakframm.

Dioutañ e tenn ar poellframmoù o braslinennoù, hogen en eskemm e tichal ennañ sabr ar framm fetis oc'h ober dezhañ skoultrennañ hag e-se rakskeudenniñ emastennoù ar framm.

Perak e vuana an argerzh frammañ.

Pemp bloaz a voe ret evit lakaat S.A.D.E.D. en e blom; tri a voe a-walc'h da gKelc'h Debauvais evit ober kemend-all. Penaos displegañ hevelep buanaat an argerzh a gaver war holl dachennoù al labour frammet ? Daou rumm abegoù ez eus, keñverek an eil d'an "hent a-zremm", egile d'an "hent a-zerc'h" :

- abegoù o tennañ da stummadur ar wazourion (d'an hent a-zremm);
 - micher ar frammañ a zeu da vezañ anavezet ha skoueriekaet;
 - kreskiñ a ra barregezh ha niver ar wazourion gant an arc'hwel;
- abegoù o tennañ da ziorreadur ar geodedourion (d'an hent a-zerc'h);

labourat er framm a c'hoarvez da gentañ a erounit an amkanioù pleustrek anezhañ; c'hoarvezout a ra ivez, en tu hont d'an amkanioù pleustrek-se, a grouiñ ur sevenadur brezhon nevez, an hini end-eeun a vasto da ezhommoù ar bobl vrezhon. Dre grouiñ ar sevenadur-se e tiorre oberer ar framm, ouzhpenn e varregezh a wazour, e bersonelezh a geodedour brezhon. Dre-se ez a war lemmaat e skiant eus ezhommoù ar Vrezhoned a zo da gentañ ezhommoù ar Brezhon nevez ez eo-eñ. E-se emañ en ur "stad a c'hras" evit o ergorelaat, kizidikoc'h ez a e skouarn da selaouennañ maeziad an ezhommelezh vrezhon.

- (1) Dafar 64 evit ar Geriadur Broadel, Preder 64-65/67, 1964.
- (2) Gwazour g., neb a zo dezhañ ur garg en ur gwazadur (Emsav 5/125).
- (3) Hollenn b., hollad sellet evel un unvez.
- (4) Sl. Emsav 9/225, 12/317.
- (5) Gwerc'h g., galloud d'ober udb., efedusted.
- (6) Arc'hwelañ v., mont en-dro, labourat, db. un ijinenn, h.a..
- (7) Darnodiñ v., imboure'hañ diouzh tro-vat ha tro-wenn; un darnod-adenn zo un taol-arnod renet en doare-se.
- (8) Kevanaat v., degas udb. d'e furm glok, kevan; gougevaniñ A ouzh B zo degas A da vezañ parzh eus B.

AR C'HERIEKAAT

Ne vo kavet amañ nemet un nebeut evezhiadennoù a-zivout ar c'hêriekaat, renket dindan pevar zalbenn :

- An Emsav kozh hag ar c'hêriekaat. •
- Un enklask : termenit petra eo ar c'hêriekaat.
- Klozadurioù devezhioù-studi Rouen diwar-benn ar c'hêriekaat.
- Un nebeut kudennoù pleustrek ha rannel evit diskouez pegen niverus eo ar c'hudennoù nevez a zo da ziskoulmañ er c'hêrioù.

An Emsav kozh hag ar c'hêriekaat.

E-pad pell amzer eo bet anat d'ar Vrezhoned e oa fall buhez ar c'hêrioù. Er c'hanaouennoù poblel pe el lennegezh savet evit tud ar maezioù e veze rebechet d'an divroidi n'eo ket kuitaat o bro, met "mont d'ar c'hêrioù lous da goll o yec'hed". Moarvat e kolle kalz Brezhoned o yec'hed en abeg d'an doareoù-labourat a oa diouzh ar c'hiz e labouradegoù 'zo pe en abeg d'ar micherioù izelañ miret d'an dud didra. Evelato ne zeue ket a-benn ar Vrezhoned da spisaat abegoù gwirion o diazasted kevredigezhel en ur bed na oa ket bet prientet evito e nep doare. E-lec'h mont d'ar c'hudennoù politikel hag anzav e cant enket en abeg da zigempouez an darempredoù brezhon-gall ec'h enebent ar maezioù ouzh ar c'hêrioù. O studiañ ar skridoù e brezhon-eg abaoe eil hanterenn an 19^t kantved e c'haller spisaat ar prantadoù-mañ e diorreidigezh un emskiant politikel e-ser ar c'hêriekaat, rak mar'd eus ur gudenn a ra'dave atav d'ar politikerezh ez eo surmat kudenn ar c'hêriekaat. Ster-orin an daou c'her, "kêriekaat" ha "politikaat", zo damheñvel a-hend-all.

1) Ar maezioù zo mat, ar c'hêrioù zo fall. Un emzalc'h kouerel eo kement-mañ evel just, met n'eo ket atav. Kalz tud o deus ranket kuitaat kêr evit abegoù disheñvel, a chom merket gant seurt mennozioù,

hag ur ster gwirion e c'hell kaout seurt emzalc'h.

2) Ar c'hêrioù zo fall, ar maezioù zo ken fall all : deomp d'ar gouelec'h. Adal ma krog an den da veizañ kement-se e krog da adsevel ar bed. Gwelout a ra n'eo ket hepken ur gudenn lec'hel pe ur gudenn a derkadur a zo dirazañ da zirouestlañ, met ur gudenn denel. Ar skouer vrasañ hon eus e Breizh eus hevelep emzalc'h eo Meven MORDIERN (1) : evel an dud veur ez eo aet d'ar gouelec'h evit seveniñ e oberenn veur a zo bet ar yezh lennek. Moarvat ne oa ket e-unan a-grenn, met heverk eo e vennozioù hag an doujañs en doa ouzh an dizoloerion vroioù, an ergerzhourion, ar wastadourion, da lavarout eo atav an dud o deus bevet en digenvez.

Ret e vefe studiañ hiroc'h ar poentoù-mañ evit gwelout peseurt hent en deus an Emsav da ober a-benn diorren ur gelennadurezh a-zivout ar geoded.

3) Tamm-ha-tamm e teu an Emsav da spisaat e vennozioù, da anaout talvoudegezh ar vuhez kevredigezhel ha kêrel. Ar prantad-mañ a glot gant diorreidigezh mennozioù resisoc'h a-zivout ar politikerezh (2).

Kêriekaat n'eo ket hepken mont e kêr. Er mare-mañ e welomp ur bern tud e Breizh o kuitaat ar maezioù hag o vont da chom e kêr. Engroezioù en em dolp evel-se tro-dro d'ar c'hêrioù pe d'ar greantvaoù met hep ren etrezo kedvuhez wirion ebet. Yoc'hadoù proletaerel e teuont da vezañ, korvoet gant renkadoù uheloc'h a oar mat-tre pere eo kudennoù don ar gevredigezh hag a ziorre ar gevredigezh-se evit o mad dezho. Adal bremañ e c'hellomp lavarout ez eo kêriekaat diorren ar Geoded, da lavarout eo diouzh un tu krouiñ skourroù nevez evit liesaat an darempredoù etre an dud, arbennikaat ar skiantoù a denn da vuhez an dud er c'hêrioù, ha diouzh un tu all, hollekaat ar d'hudennoù, unvaniñ an dud, o frammañ en ur Stad nevez (3), o boazañ da gendivizout ha da drehontiñ o c'hudennoù pe o enebiezhoù...

Met a-raok mont pelloc'h, marteze e vefe mat gouzout petra a soñj an dud dre vras a-zivout ar c'hêriekaat.

Un enklask a-zivout ar c'hêriekaat.

Un enklask zo bet graet warlene e Frañs e-touez an dud desket dre vras, evit gouzout penaos eo meizet pe empennet ganto ar c'hêriekaat. Mar befe graet hevelep enklask e-touez tud an Emsav e vefe kavet marteze respontoù damheñvel. Setu testenn an aters-diazez :

"Diwar hoc'h arnodoù ha hervez an atebegzhioù hoc'h eus bet tu da sammañ en ho puhez, petra eo evidoc'h ar c'hêriekaat ?"

Liesdoare eo bet ar respontoù, met aes a-walc'h eo renkañ o elfennoù e tri rummad : ar respontoù deskrivadurel, n'o deus merket dre vras nemet neuizioù a-ziavaez ar c'hêriekaat (4) evel devoud estren da youl an den; ar respontoù o deus pouezet war elfennoù talvoudus ar c'hêriekaat; ar respontoù o tiskouez ar pezh a zo nac'hel er c'hêriekaat.

Neuizioù meneget er respontoù deskrivadurel

Ar c'hêriekaat evel kreskidigezh ar c'hêrioù diwar greizennerezh pe dolpidigezh un niver bras a dud war un dachenn enk a-walc'h, gant kemmeskoù poblañs; pe evel treuztiriadur (5) eus ar maezioù etrezek ar c'hêrioù en abeg da vondougoù (6) engroezel an dud. Peurliesañ e chom ar respontoù gant neuizioù diavaez ar gudenn, pep hini o welout ar c'hêriekaat diouzh toull e zor. Da skouer ez eo techet tud ar maezioù da welout ar c'hêriekaat evel aloubidigezh ar maezioù gant ar c'hêrioù. Empennet e vez ivez gant an hevelep responterion kresk ar c'hêrioù evel un devoud-distag-diouzh-ar-greantelaat pe diorreidigezh an nevidoù.

Respontoù o pouezañ war an elfennoù talvoudus

Ar re-mañ a glask dija kemer un emzalc'h bunhez ha barn ar c'hêriekaat e-keñver an talvoudoù denel hag ur politikerezh bennak : un eienenn a binvidigezh denel ha sevenadurel eo ar c'hêriekaat, un araez da zigeriñ ar spered, un dro da gaout muioc'h a eskemmoù kevredigezhel emsavus. Gwellaet e vez gantañ an annezadur, ar glet-

adurezh (7), ar yec'hed. Broudet e vez ar vuhez e pep keñver, dreist-holl e-lec'h ma teuer a-benn da sevel kreizennoù gwirion e-keñver sevenadur, politikerezh, armerzh.

Respontoù o lakaat a-wel an elfennoù nac'hel

Danjerioù a bep seurt ez eus ivez : tolpadur an dud hep perzh gwirion roet dezho e sevenidigezh o zonkad. Ur c'hamp-bac'h e teu neuze ar gêr da vezañ, pe gentoc'h ar ranngêr, rak neuze e vez yoc'h-et an nevezdeuidi e karterioù proletaerel hep sevenadur ebet : ar grugell-verion a washa an digenvezded hag an dizanvegezh. Unneuziet ha dibersonelaet e vez an dud, dizenekaet ivez. Respontet e voe c'hoazh ez eo alies ar c'hêriekaet penndevoud ur giladenn war an unan, ur broud d'an emgarouriezh hag ur moug d'an emnac'h evit mad ar re all, c'hoant da zastum muioc'h a arc'hant, hoal d'ar plijadurezhioù ha d'ar c'hoantegezhioù diroll. Koll a ra ar ploueziad treuz-tiriet an henvoazioù hag an talvoudoù diogel stag ouzh stuzegezh ar maezioù. Micherioù a ya da get; disprizout a reer an douar; dilezel a reer ar c'hêriadennoù bihan a vent denel e-lec'h ma c'halle, a-hervez, an holl en em anaout.

Da heul an enklask-se e voe goulennet digant ar responterion sevel un dresadenn hag ur raktres eus ar gêr skouerel evel m'hec'h empennent. Moarvat e vefe talvoudus adober an arnodadenn-se en un dalc'h-labour eus an Emsav ha kavet e vefe respontoù heverk.

Klozadurioù Devezhioù-Studi Rouen Frañs, Meurzh 1967.

"Ar c'hêriekaat zo un doare nevez da berc'hennañ an egor"

Skinfilmoù diwar-benn ar c'hêrioù e Normandie a ziskouez penaos o deus kemmet ar c'hêrioù er c'hantvedoù tremenet, ha pegen buan e kemmont abaoe an eil brezel-bed. Skouerioù resis eus enkadennoù c'hoarvezet e kêrioù 'zo a spisa ar c'hudennoù nevez a sav. Degaset e vezer buan d'ar c'hlozadur-mañ : da heul ar c'hêriekaat e sav muioc'h eget ur gudenn a derkadur, ur gudenn a sevenadur eo e gwir-

ionez, a ra save da ziskoulmoù speredel ha politikel da gentañ. Ur goulenn a sav neuze raktal : daoust hag-eñ e vo ar c'hêriekaet gouzañvet pe vestroniet gant an den ? Penaos kompren ar c'hêriekaet evit lec'hiañ gwelloc'h ar c'hoarvoud-se en emdro ar bed arnevez ? Peseurt darempredoù zo etre kudennoù ar gêr ha kudennoù an tareadoù kêrel ?

"Ar c'hêriekaet a grou ur stumm nevez a zarempredoù etre an dud"

Ar c'hêriekaet evel stumm nevez a zarempredoù etre an dud : diemframmadur diouzh ur gevredigezh kozh, dizanvegezh da heul, ha tro d'un emframmadur nevez (8) dre gemer perzh e buhez ar gêr evel keodedour.

Ar gêr evel keoded a zizarbenn an emzalc'hioù rannel, ar getoioù, ar yezhoù disheñvel, evit diorren hepken skourroù kenglokaus a ro d'ar gêr an tu da vevañ hep en em zispenn ha da vastañ da ezhommoù don ha liesdoare an den.

Daoust da se e chom ar boblañs kêrel kemmus, liesdoare, engroezel e meur a zegouezh. An aozadurioù sevenadurel, an ensavadurioù politikel, relijiel, armerzhel o deus da aremprediñ (9) poblañs ur gêr, a rank sevel doareoù nevez en amboaz-se.

"Ar c'hêriekaet a ziorre dre ret ur bed a dalvoudoù nevez"

Meur a wech hon eus bet tro (10) da studiañ an treuzfurmadurioù reverzhiel a oa c'hoarvezet er gedvuhez a-c'houde an 18^t kantved. O displegañ a reer dre vras evel heuliadoù ar Reverzhi C'hreantel. Un doare eeunaet eo evel just da ziskleriañ an traoù. E gwir, ned eo ar Reverzhi C'hreantel nemet un arvez eus diwanidigezh un oadvezh nevez. Un arvez all eo ar c'hêriekaet, kevamplegañ a ra ur paoctaat eus an darempredoù kevredigezhel, evel m'hon eus merket uheloc'h, ar pezh a c'haller sellout evel an arvez kedvuhez eus ar reverzhi stlennel er greanterezh; kevamplegañ a ra ivez ur meizadur nevez eus ar Stad hag eus urzhiadur arc'hwelioù ar vroad : frammekaet e vez strizh-ouzh-strizh an holl c'hennadoù eus ar gedvuhez. Ouzh ar patrom

nevez a geoded e rank klotañ ur patrom nevez a geodedour.

Mar keñverier ar sevenadur koueriadel henvoazel hag ar gedvuhez rakkalvezel er c'hêrioù diouzh un tu, hag ar gedvuhez kêrel nevezkalvezel diouzh an tu all, e weler ar c'hemm bras a zo c'hoarvezet en emdro an denelezh. Pa seller ouzh ar sevenadurioù rakgreantel, ouzh ar Grennamzer Gornogeuropat da skouer, e c'haller komz eus ur Geoded hag eus keodedourion. Daoust hag-eñ e c'haller ober kemend-all evit hor sevenadur-ni ? E Breizh, anat, ez eo aet ar Geoded da get dre weredoù a zisoc'has gant diskar ar Stad ha, da heul, dispenn ar gevredigezh vroadel. Hag-eñ n'emañ ket ar c'hevredigezhioù all a Gornog o kouezhañ en hevelep drouziwezh dre hentoù all en hor mare? Abretoc'h hepken e ve aet ar Bed Kozh da get en hor bro hag er broioù bihan heñvel outi? Hag-eñ ne gav ket aze an Emsav e roll hollvedel : diorren ar patrom nevez a geoded hag a geodedour o vastañ da ezhommoù an denelezh arnevez ?

Un nebeut kudennoù arbennik.

Meneget eo ar c'hudennoù-mañ hepken evit diskouez an enklaskoù a vefe d'ober.

An holl a oar endeo ez eus kudennoù disheñvel gant ar vugale vihan, ar rakkrennarded, ar grennarded, ar yaouankiz, an dud en o oad, ar gozhidi. Studiet eo bet a-dost ivez emzalc'hioù ha diaesterioù an holl rummadoù-se hervez ma vevont e meurgêrioù a vuioù eget 1 000 000 a annezidi, en tareadoù kêrel, e kêrioù bras (etre 100 000 hag ur milion), e kêrioù-etre (dindan 100 000 ann.), e kendioù bras pe e kumunioù war ar maez. Menegomp hepken :

- Stuz ar yaouankizoù abaoe m'int tolpet a-gevret e skolioù a bep seurt. Gwechall e veze enframmet kalz buanoc'h ar re yaouank gant an oadourion, ha forzh penaos ne vevent ket en ur bed dezho o-unan. Bremañ ez eus un danjer bras peogwir ne zeu ket ar re yaouank a-benn da gaout perzh abred a-walc'h er bed oadourel. Warlerc'hiet e chomont neuze e-keñver kedvuhez.

- Kudenn an disparti re vras etre paotred ha merc'hed. Studiet mat eo bet ar gudenn-se en Alamagn hag e Danmark.

- Emzalc'h bugale ar c'hêrioù dirak tonkad an den, ar vuhez hag ar marv. War ar maez e tesk buan pep bugel ent-kantouezel (11) arvezioù fetis ar genel hag ar mervel. Alies e chom bugale ar c'hêrioù dic'houzvez-kaer war ar poent-se, evito da gaout kealioù e-leizh war o divout dre araez al lavar : ar marv da skouer a vez dezho ur c'heal boutin, met difetis, er-maez a-grenn eus o buhezadur pemdez-iek, dre an arbenn ma ne vez ket roet dezho an dro da arvestiñ ouzh tremenvan an dud a anavezont. Hevelep buhezañ en difetis zo dezhañ heuliadoù grevus evit ar stuzegezh ha yec'hed ar bred.

- (1) Sl. Gwilherm DUBOURG, Isdiorreadur hag Istor, Preder 84-85/25 ha 36 pergen.
- (2) Sl. Youenn OLIER, Ar brezhoneg er c'hêrioù, Al Liamm 124/418.
- (3) Sl. Petra eo ar framm ?, Emsav 14/33.
- (4) Meur a ster zo e gwir d'ar ger kêriekaat. Merkañ a ra : a) evit ur vro, ar c'hreskiñ enni eus ment ha niver ar c'hêrioù; b) evit ar gedvuhez hag ar stuzegezh, kemer doareoù kêrel, - er ster-mañ e lavarer ivez kêrelaat; k) ent-hollek e veneg ar ger an daou zevoud a) ha b) diagent hag, en tu all dezho, kement treuzfurmidigezh kevredadel, sevenadurel, politikel o tont d'o heul.
- (5) Sl. Emsav 5/120, hag ivez ar pennadoù o venegiñ emdroadur ar poblañsoù hag ar stuzegezhioù da heul ar Reverzhi C'hreantel : Emsav 4/82, 5/117, 6/150, h.a.
- (6) Bondoug g., lusk bevedel emdarzhiek o kenurzhañ an oberoù war-du ur pal; sk.: ar bondoug-gouennañ o lakaat an evned da sevel neizhioù.
- (7) Kletadurezh b., kement a c'hell aesaat ha plijusaat ar vuhez pemdeziek, kreskiñ an hevoud, evel aveadurioù an tiez-annez, gwelladur an araezioù-kehentiñ, h.a.
- (8) A-zivout argerzhioù an diemframmadur hag ademframmadur e-ser ar Reverzhi C'hreantel, lenn : Pêr PENNEK, Isdiorreadur hag Armerzh, Preder 84-85/2 hag 8 hh. pergen.
- (9) Aremprediñ v., ober war-dro, kemer damant gant, servijout.
- (10) evel (5) & (8).
- (11) Kantouezañ v., anaout war-eeun e-ser buhezañ, pleustriñ, enebet ouzh an anaout e-ser poellata pe dre hantererezh al lavar; ent-kantouezel, amañ, a dalvez dre gantouezañ.

C'K
AN ARMERZHILOU KENGLADEL

II. KUDENNOU PLEUSTREK. ADREIZHADURIOU.

Erounezadur ar steuñv war an trobarzh.

Brasañ splèt gwikefre an nevid eo diogeliñ aes ha buan ar c'hempouez korrgantel (G.GROSSMAN), da lavarout eo etre goulennoù ha kinnigoù madoù ha gwazadoù e par an embregerezhioù. E diouer un hevelep gwikefre, e rank ar steuñverion sammañ ar roll ponner da geitañ deiz-ha-deiz amredoù ar prenañ hag ar gwerzhañ e-ser pep firm, dre sturiadoù munudaouet kevreizhet gant amkanioù hollek ar steuñv broadel.

Klokaet e vez ar reizhiad-se a sturiadoù gourc'hemennus gant ur reizhiad all, kemplezh kenan, a annougù arc'hantel (1), a zo he fal degas lazioù pep oberer armerzhel da glotañ gant erounezadur ar steuñv.

Kudennoù e-leizh a sav diwar genc'hoari an div reizhiad-se.

Ar sturiadoù roet d'an embregerezhioù : ar steuñvoù bloaziek

Ar steuñvoù hirdermen, - pempbloaziek pe seizhvloaziek, - a bled dreist-holl gant ar gennadoù meurgantel hag ar c'hevanstrolloù; n'int ket arveradus war-eeun evit sturiañ an embregerezhioù ha jubennet e rankont bezañ. Hogen ne c'hell ket bezañ a steuñverezh gourc'hemennus hep amkanioù korrgantel spis, - ar re-mañ hepken o reiñ an tu da varn al labour kaset da benn gant an embregerezhioù. Amañ eo e c'hoari o roll ar steuñvoù bloaziek, ar re nemeto a zo oberatael, peogwir ez eo drezo e tiviz ar steuñverion kenderc'h, postadurioù ha pourvezadur pep embregerezh, ha krouidigezh an embregerezhioù nevez.

Mar seller ouzh ar re-mañ, ne c'hell o savidigezh bezañ divizet nemet gant an ensavioù-kreiz. Greanti nevez ebet ne vez adeiladet hep ur raktres savet gant gwazvaoù-kreiz an ijinouriezh e gourc'hemenn ar steuñverion ha fiziet da c'houde er aozadurioù-adeiladiñ greantel. Munudaouet ur souezh eo seurt raktresoù : hiní ur greanti

houarnouriezh e Novo Lipetsk da skouer a oa 91 levrenn, 70 000 pajenn ouzh e ober.

Evit an embregerezhioù en arc'hwel, emañ o meradur pemdeziek e dalc'h steuñv bloaziek an embregerezh, anvet ivez "steuñv kalvezel, greantel ha kellidel (2)", teul ponner oc'h erverkañ amkanioù ar bloavezh evit pep trimiziad ha pep miziad.

Étre ebrel ha kerzu bep bloaz e vez darbaret ar steuñvoù embregerezh e-ser ur monedone etre an ensavioù-kreiz hag an trobarzh, eleze etre Steuñvgor an Unaniezh (Gosplan), steuñvgor ar republik, ar sovnc'h (3) hag an embregerezh. Dre ar monedone-se e vez danzeet ur steudad steuñvoù bloaziek urzhasaet, steuñvoù embregerezh, steuñvoù sovnc'h, steuñvoù republik, Steuñv an Unaniezh, pep pazennad steuñvoù o vezañ klenket er bazennad uheloc'h. E karg atebelion pep pazenn emañ gwiriañ klenkadur dik ar bazennad dindan, ar peurwiriadur o vezañ kaset da benn gant Steuñvgor an Unaniezh.

Ar benveg embreget evit gwiriañ kempellded ar steuñv - dikted klenkadur ar pazennadoù - eo ar ventel danvez, taolenn o tiskouez stad pep barregezh danvezadus ha danvezet en armerzh. Da skouer :

Mentel danvez evit ar c'henderc'had X.

Danvezusterioù	Danvezadurioù
1. Kenderc'hadur (kroueriet dre republik).	1. Ezhommoù ar c'henderc'hadur.
2. Enporzhiadurioù.	2. Adeiladur.
3. Orinoù all.	3. Bevezadur.
4. Staliadoù er greantioù-oberiañ e derou pep prantad (kroueriet dre republik).	4. Ezporzhiadur.
	5. Amparadur miradoù.
	6. Staliadoù er greantioù-oberiañ e diwezh pep prantad (kroueriet dre republik)

Bep ma pellaont war-du an trobarzh ez a ar steuñvoù war vunudacuiñ. Setu da skouer petore sturiadoù a gaver en ur steuñv embregerezh hungariat :

- kementadoù da genderc'hadur pe da werzhañ, termenet e moneiz pe e traezoù (reoù arc'henadoù, tonennoù dir), ar sifroù o verkañ zoken an dazrummadur (4) kemennet;
- perzhded an oberiadennoù, e stumm un dregantad a unanennoù kentañ renk da ziraez;
- an hentennoù kalvezel da arverañ hag an askoradoù da dizhout (termenet dre reoladoù (5) kalvezel o verkañ da skouer ar c'hementad tredan uc'hek (6) da vevezañ ha niver izek ar pezhioù da oberiañ dre eurvezh gant un ijinenn lavaret);
- ar priz-koust uc'hek evit ur c'henderc'hadur lavaret pe ar c'henderc'hadur a-bezh;

*gwerzhadur
adilidur*

clouadur

goude

normes

- niver ha gopradur uc'hek ar c'hoskor;
- sav ar postadurioù, al labourioù adeiladiñ, ar prenadurioù;
- meradur ha mentel arc'hantel ar firm, o verkañ sav ar buzadoù d'ober hag an doare ma tleont bezañ graet.

Evel a weler, e tle an embregerezhioù n'eo ket hepken erounit ar steuñv, met ivez ober berzh e-keñver an arc'hant, heuliañ evel ma lavar Soviediz pennaenn ar Khozrastchot ("meradur armerzhiek"), anezhi tri endalc'h : a) derc'hel jederezh ar prizioù-koust b) lakaat ur buzad da ziwanañ e diwezh pep bloavezh k) uc'hekaat ar buzad-se.

Ouzhpenn ar c'henderc'hañ hag ar postañ a vez reolet gant ar steuñv : an treuzgreadoù kenwerzhel a embregerezh da embregerezh ivez a vez steuñvet gant ar sovnarc'hoz.

Bep hañv, e kas pep firm ur goulenn pourvezadurioù evit ar bloavezh da heul. Gant ar sovnarc'hoz e vez degemeret, burutellet ha krennet diouzh ret, ha daveet, war un dro gant holl c'houlennoù embregerezhioù all e amgant (7), dirak steuñvgor ar republik. An disentezioù diwezhel a zeu eus Steuñvgor an Unaniezh dre ar steuñvgorioù republikel hag ar sovnarc'hozioù o erounez dre lod-ennañ bilhedoù-pourvezadur etre an embregerezhioù. Ouzhpenn 15 000 rumm aozadoù a rank evel-se kaout aotreadurioù evit tremen eus ur greanti d'unan all.

Hogen kemm a ra e-kerz ar bloaz an amkanioù armerzhel ha da heul e rank ar steuñvoù bloaziek bezañ daskemmet, a-wechoù meur a wech, e-ser bezañ erounezet. A-du-rall, an embregerezhioù o-unan a c'hell bezañ rediet da c'houlenn koazhadurioù d'o steuñv pa zeu anat dezho, dre un arbenn pe un all, ne vint ket evit e erounit.

En doare-mañ ez eo termenet pennaenn azverat ar steuñvoù : evit kaout daskemmoù en e steuñv bloaziek e rank an embregerezh kaout aotre ar sovnarc'hoz; diouzh e du, ha da heul, e c'hell hemañ oberata daskemmoù-kempouezañ, da skouer muiaat (8) o steuñv d'an embregerezhioù gwellañ ha leiaat o hini d'an embregerezhioù dister, a-benn ma vano digemm trolinenn hollet steuñv ar sovnarc'hoz. Dre-se avat alies e koll ar firmoù askorus un darn eus o buzadoù, hag o labourerion da heul un darn eus o arc'hoproù.

Pa zisoc'h an daskemmoù da zistummañ trolinenn steuñv ar sovnarc'hoz, e rank hemañ goulenn disentez digant ar bazenn a-us, eleze digant steuñvgor ar republik.

Un tun a c'hell sovnarc'hozioù 'zo tennañ eus an argerzh-mañ diwezhañ a-benn lakaat distennañ o steuñv. Erverkañ a reont amkanioù dizingal-tre hervez an embregerezhioù, darn re uhel anat, darn all re izel ken anat-all. Aes dezho prouñ da c'houde e rank

an amkanioù re uhel bezañ gouzizet ha dre-se ar c'henderc'h hollel erverket d'ar sovnañc'hoz bezañ digresket. E-giz-se ez aint didenn dreist o steuñv, o vezañ ma c'hell an amkanioù chomet en erverk bezañ diraezet hep poan.

Diouzh o zu e c'hell an ensavioù-bleniañ daskemmañ Steuñv an Unaniezh pe steuñv ur republik diouzh ma vez ret gant al levier-ezh-Stad. E mareoù 'zo avat e paota kement an taolioù-kempenn-se ma'z int ur vammenn a strafuilhoù grevus evit standur an embregerezhioù. "Seurt doare-ober a denn da zidalvoudekaat ar steuñv e kement ha ma'z eo lezenn an embregerezhioù, a zegas an dud da vagañ dismeg ouzh ar riñverezh kalvezel hag armerzhel hag ouzh ar steuñverezh e-unan; blinaat a ra kenurzh ar Stad" N.KHRUCHTCHEV.

An annougouù arc'hantel da erounit ar steuñv

Ul lezenn eo enta ar steuñv hag an embreger na sent ket outi, na erounez ket e steuñv, a c'hell bezañ kaset dirak ar barner.

Douget e vez kastizoù diseurt ouzh ar fellerion armerzh. Abaoe kemennadoù 1961 ha 1962 e reer pevar rumm eus ar c'houloù (9) armerzhel kastizadus gant ar marv en U.R.S.S. : ar falsvoneizañ, an trafikerezh-arc'hant, tuerezh ar madoù kengladek, an tarwazer-ezh (10). Bloavezhioù trevvac'h (11) a vez lakaet war ziv felladenn, anezho ren un obererezh didalvoud evit ar gevredigezh (arvevadezh kevredigezhel), ha kemer ur gourc'hwel a live izeloc'h eget hini an diplomoù piaouet. Toull-bac'h zo evit an embregerion a ra falsdanevelloù eus labour o firm.

Padal n'eo ket a-walc'h ar c'hastizoù evit broudañ an obererion da seveniñ o c'hefridi armerzhel. Atizadurioù yael a vez lakaet da c'hoari, dre ar c'hevuziadurioù.

Annougusted ar gopr-diazez.

"Sturiaderezh an dud-labour o vezañ bet liammet da viken ouzh anv TROTSKY, e rankas STALIN - dre eurvad evit istor ar bed - pellaat diouzh ar mennad-se dre vras ha degemerout roll nevid al labour". Ar flipadenn-se gant P. WILES a ziskler mat a-walc'h stuz an dud-labour en Unaniezh Soviedel. Peurvuiañ e vez lezet e c'hourc'hwel e diuz al labourer; dre-se e c'hell ar gopr-diazez (eleze ar gopr kuit a arc'hoproù) bezañ arveret evit annouezh ar vicherourion : peogwir e c'hell ar re-mañ dibab o gourc'hwel, e vo tu d'o dedennañ gant goproù uheloc'h d'al lec'hioù ma vezo ezhomm anezho, e vo tu ivez d'o broudañ da greskiñ o askoradoù hag o ferzhegezh dre c'hrataat

dezho enraog en urzhaz ar goprou.

E mareoù 'zo avat e voe embreget doareoù 'zo a sturiaderezh, da skouer :

- kospoù (12) lakaet ouzh heloc'hted re vras ar vicherourion, dre o rediañ da gaout aotreoù-hentañ;
- ar redi m'emañ izili ar Strollad hag ar yaouankiz komunour (komsomled) da sentiñ ouzh sturiadoù ha da gemer gourc'hwel ent-dezvel diouzh an ezhommoù, pa vez douaroù divoulc'h da zigeriñ da skouer;
- ar redi ma vez ar studierion pa guitaont ar Skol-Veur pe an ensavadurioù kalvezel da gemer ur stael (13) termenet evit ur badelezh termenet;
- ar c'hampoù gwazerezh-kastiz (bet freuzet e 1956), na voent ket krouet a-ratozh evit pourchas tud-labour marc'had-mat d'an armerzh, hogen, dav eo henn notañ, a amparas ur mare 'voe ur barr-kenderc'h-añ uhel a-walc'h peogwir e roent e 1941 12 % eus tud-labour ar c'hoataerezh, an hanter eus eztennerion ar c'hrom ha 18 % eus ar postadurioù, tra ma oa 200 000 labourer trevvac'het evit abegoù politikel oc'h adeiladiñ ar ganol etre Leningrad hag ar Mor Gwenn;
- ar barnedigezhioù ouzh an oberoù "didalvoud evit ar gevredigezh"; e 1964 e voe kondaonet ar barzh BRODSKY da 5 bloaz labour-kastiz war an tamall a "arvevadezh kevredigezhel".

Neozh hiziv e c'hell forzh pe labourer dilezel e labour hep tennañ warnañ kosp ebet gant ma kemero ur gourc'hwel nevez dindan ur miz.

Etre 1917 ha 1930, dreist-holl e grez ar Gomunouriezh vrezel, e veze sellet keitadur ar goprou evel un amkan da dizhout. Diwar ar c'hentañ steuñv pempbloaziek avat e voe kondaonet an amkan-unrezañ-se evel "utopek" gant STALIN. E 1931 ez ezrevelle hemañ dirak ur c'hendalc'h renerion c'hreantioù, e-touez "c'hwec'h amplegad an trec'h" : freuzadur kevatalerezh ar goprou. Da heul e voe tregemmet kevuziadur al labourerion war veur a arbenn :

- dedennañ an dud-labour d'ar gennadoù pe d'an tiriadoù ma vez ar muiañ ezhomm anezho; en doare-se da skouer e voe bastet goprou uhel da vicherourion an ijinerezh ponner diwar-goust al labourerion all;

- atizañ al labourerion da greskiñ o askoradoù dre ar c'hendamouezh (stac'hanovegezh) hag ar spi da gaout goprou uheloc'h;

- deuriadekaat ar c'hoskor e kerzh an embregerezh : en U.R.S.S. abaoe 1930 ez eus e pep firm ur "glad a'n embregerezh" amparet diwar

an dreistbuzadoù (ar buzadoù en tu all d'ar re merket gant ar steuñv) hag o talvezout da sevel tiez-annez d'ar c'hoskor, da dalañ arc'hopr-
où, d'ober postadurioù e-maez steuñv, - bihan eo avat al lodenn a
zegouezh da bep labourer ent-hiniennel. E Polonia hag e Hungaria, en
enep, dindan levezon Yougoslavia, ez eus ur perzhiekadur gwirion, a
c'hell sevel betek daougementiñ ar miziad gopr.

An ensavioù-kreiz eo evel just a zifer : a) urzhaz ar goprou
b) ar sammad holl el bloaziek anezho, anvet "glad goprañ" k) feur
ar gopratur diouzh an askorad. Nag an embregerezhioù, nag an aotr-
ouniezhoù lec'hel n'emaint e gwir da emellout e leviadurezh ar
goprou.

E-kichen ar mennad da dregemmañ e ranker menegiñ kempennadurioù
a denn da gurzhañ urzhaz ar goprou : ar goprou-tiegezh (hogen izel
ez int hag e teraouont gant ar pevare bugel); ar c'hretadur-kleñved
(hogen, er-maez eus ar c'hlañvdiadurioù, ne vez dastalet nemet
mezegadur ar malaria hag ar c'hleñvedoù gwenerel); ehanoù gopret
(a bad 12 devezh oberat); gwazadurioù kevredigezhel, evel an tiez-
diskuizh (met dister e chom niver ar gweleoù enno e-skoaz ar goul-
ennoù), evel gourliorzhoù ar sevenadur (a zo lec'hioù-dihuediñ
foran); eztaosadur ar madoù sevenadurel evel al levrioù, ar plad-
ennoù, ar binvioù skingomz ha skinwel; ar feurmoù izel.

An annouezh dre an arc'hopr- où.

War an holl c'hopridi e c'hoari an annouezh dre ar gopr-diazez;
en enep, an annouezh dre an arc'hopr-
où a sell hepken ouzh ar c'hoskor-
blein. Savet int bet evit reiñ d'an embregerion abegoù arc'hantel da
erounit o steuñv, ken a-fet kenderc'h, ken a-fet buzadoù, hag ivez
evit o broudañ da gemer preder gant o embregerezh, da skouer da
armerzhañ an danveziou dibaot, da greskiñ askorusted an dud-labour,
da virout an termenou dereiñ, da zegas nevezadennoù kalvezel. E 1960, e
Hungaria e save arc'hopr-
où an tri atebeg pennañ eus an embregerezhioù
(ar rener, ar pennijinour, ar pennjedour) d'an 30 ha d'ar 40 % eus
o goprou.

Kudennoù ar c'henc'hoari etre ar sturiadoù hag an annougoù

Pal an atizadurioù arc'hantel eo lakaat lazioù an obererion da
zegouezhout gant gwellañ erounezadur ar steuñvoù bloaziek. Ne vez ket
bepred tizhet ar c'hendegouezh distroñs.

Ar goprou-diazez hag ar pleustr.

Ar Stad eo a zifer dasparzhadur ha sammad hollel ar goprou.

Evit ar goprou talet diouzh an askorad, e tle ar gopr-diazez klotañ gant reoladoù al labour, e doare ma tegemero ar micherour gwerzh e c'hopr-diazez mar kas e labour rik diouzh ar reoladoù. Hogen ne c'hell reoladoù al labour bezañ jedet nemet war an dachenn. O vezañ ma vez bepred diouer a dud-labour ec'h en em aoz an embreger evit ma ve talet ur gopr uhel hep terriñ ar reizhennoù : merkañ a ra reoladoù labour izel a-walc'h evit ma vint aes da leuniañ ha da dremen. E-se, o deus ar goprou keitat en U.R.S.S. ouzhpenn daougementet etre 1940 ha 1953, pa greske ar gopr-diazez eus 25 %.

Evit ar goprou diouzh an amzer, ne c'haller ket o gorren dre embregata ar reoladoù. Evit ma ne zeufe ket un disparelezh re vras gant ar goprou diouzh an askorad ez argerzher e meur a zoare : dreist-perzhekaat a reer al labourer, sevel anezhañ d'ur bazenn uheloc'h eget hini e berzhegezh werc'hel, h.a.

An arc'hoprou hag un nebeut heuliadoù nann-mennet anezho.

An divizoù kemeret gant an embregerion dindan vroud an arc'hoprou ne glotont ket bepred gant ar pezh a venn ar steuñverion.

E-keñver ar c'henderc'h, e tenn an embregerezhioù da "c'holeiñ o barregezhioù", d'o ispriziañ evit ma ve merket dezho amkanioù aes da ziraez; pe c'hoazh da falsañ o disoc'hoù dre lakaat kenderc'h ur miz da risklañ war ur miz all; pe c'hoazh da c'hoari war dazrummadur ar c'henderc'h, en doareoù-mañ :

- o vezañ ma c'houlenner digant ar firmoù uc'hekaat gwerzh ar c'henderc'hadur ha n'eo ket an ouzhpennad gwerzh, e tibabont oberiañ traezoù koustus, pe o c'houlenn kementadoù bras a zanvezioù krai;

- an dazrummadur, pa chom e diuz an embregerezh, a vo kenaozet gantañ diouzh e splet ha n'eo ket diouzh stad ar goulenn;

- hervez an unanenn vuzuliañ dibabet gant ar steuñv e kempenn an embregerezh e oberiadoù ar ponnerañ gwellañ mar'd eo an tolz ar ventad dibabet; ar c'houstusañ gwellañ mar'd eo ar moneiz. Anat eo n'eo ket ar c'heflusker ponnerañ an hini gwellañ, nag an hini azasañ ouzh

ezhommoù ar vevezerion.

legion
unpenn
4 mes ma

E-keñver ar pourvezadurioù, emañ an embreger bepred en arvar da gouezhañ e difourk ur mulgul (14) a virfe outañ a zerc'hel gant e lañs. Evit parraat ouzh riskl an difonnennoù e c'houlenn bilhedoù-pourvezifi dreistezhomm. Ar staliadoù aozet en doare-se a roy dezhañ an tu da barraat ouzh pep treuzhent, hag ouzhpenn-se d'ober trokerezh a-gildorn gant an embregerezhioù all.

E-keñver ar postadurioù, e sav div amjestregezh :

- o vezañ ma'z eo digoust ar c'hevala postet, e vo dreistaveet greantioù 'zo, berniet enno madoù-kenderc'hañ hep splet ebet;

montes

- kilañ a ra embregerion 'zo dirak an nevezadennoù kalvezel en arbenneus ar c'holl amzer a ve ouzh o gwikefreañ, o teskiñ o embreger, hag ivez pa ouzont e vo gorreet ar reoladoù-kenderc'hañ ur wech staliet an aveadur nevez. Ar gouarnamant a stourm ouzh ar pleg-se : e 1960 e voe krouet e U.R.S.S. ur Glad annouezh an neveziñ kalvezel.

non-stab

E-keñver ar bevezerezh. Bevezer ha labourer zo o-daou er-maez eus ar steuñv. Abaoe 1937, n'eus ket ken a gartennoù-lodennañ ha, lakaet a-gostez ar glad-beveziñ kevredigezhel, e vast an tiadoù d'o ezhommoù dre arverañ o c'horvoderioù evel ma karont. Ur reoliata dre an nevid ez eus enta, ur reoliata diglok avat, rak ar vevezerion n'o deus ket levezon war an oberierion, ar re-mañ o vezañ bleniet gant ar steuñv. Hag ar steuñverion n'emaint ket, anat, el lec'h azasañ evit anaout goulennoù ar vevezerion.

Padal, abaoe ugent vloaz ez eo kresket kalz kenderc'h ar madoù-beveziñ en U.R.S.S.. Diaesterioù brasoc'h a-se a sav en arbenn eus an disklotadurioù a c'hoarvez etre sturiadoù ar steuñv ha goulennnoù ar vevezerion. "Diogel eo, pep tra o vezañ kevatal a-hend-all, e talvez ur milion a vantilli-glav kement ha div wech un hanter milion a vantilli-glav. Hogen div vantell na zereont ket ne dalvezont ket ur vantell hag a zere. Un niver mantilli, dazrummet o mentoù hag o fatromoù diouzh ezhommoù ar vevezerion ned eo ket kevatal d'an hevelep niver a vantilli kinniget e div vent ha daou batrom hepken, anez e ve evit ar stadegoù hag evito hepken" NOVE.

Adreizhañ ar c'hevansteuñviñ.

Kinnigoù adreizhañ ar steuñverezh soviedel

Sellet e vez ar c'hevansteuñviñ evel unan eus palioù an armerzh sokialour, pe gentoc'h evel an hent ret da dizhout ar gomuncouriezh. Hogen mar degas re a c'hwitadennoù, mar diskouez bezañ fall e askorad a-fet diraez an amkanioù etre (en o zouez distremen an armerzh amerikan) e teuer da zegemerout ez eo ret ober kempennadurioù d'ar reizhiad. Setu end-eeun ar pezh a c'hoarvez en U.R.S.S. abaoe 1962. E gwengolo 1962 e stagas an armerzhour LIBERMAN da embann war ar Pravda kinnigadennoù a-zivout mererezh an embregerezhioù. Hogen, pell a-raok endeo, o doa Yougoslavia e 1950, Polonia e 1956 kemeret an hent-se, heuliet buan gant Alamagn-Reter, Hungaria, Tchekoslovakia.

Perak adreizhañ ?

Tri rumm abegoù a gav Soviediz o-unan en o c'hevansteuñverezh, o tennañ d'an amaezhierzh, da zerannadur ar c'hevalaoù, da arver an titourennoù.

a) Amaezhierzh. Amañ e tamallont dreist-holl tuzumder ar benvegad amaezhiañ e par ar steuñviñ war verr dermen. Dek milion a wazourion a gav fred en emell dastum ha danzen ar stlennadoù war an trobarzh, hervez SMOLINSKY. E 1962 e tisklerie GLUTCHKOV, sturoniour ha Besarlevier Akademiezh ar Skiantoù eus Ukraina, e tenne al labour steuñviñ, gant an hentennoù o ren, da greskiñ evel daouvac'had (15) kresk ar c'henderc'hañ, kement ha lavarout e vo liesaet dre 36 a-barzh 1980 hag e vo ezhomm neuze eus poblañs a-bezh an Unaniezh Soviedel evit e gas da benn.

Kemplezh-kenan eo gwazerezh ar steuñviñ. Skoueriekaet e rank bezañ ar gwazadoù o tennañ da bep kudenn nevez ha dre-se e weler o neradiñ aozadurioù-harpañ e-leizh o deus holl da emellout en hevelep embregadur, - alese riskloù bras a zigenurzh, a zaleoù, gourfaoterekadur ar furmeladoù. Ar skouer roet alies eo hini an oberierezh tangirri Likhachev e Moskva : an urzhiadoù kludoù-ruilh kaset ganti bep bloaz d'ar greanti amezek G.P.Z. a ya d'ober un teuliad 200 kg, o tremen dre 14 gwazva reoliñ ha dasparzhañ; kement-mañ evit kaout an aotre-pourveziñ, ar pezh n'eo ket c'hoazh kaout ar pourvezadurioù aotreet, - peogwir e tegouezhas 4 000 lizher-klemm ouzh ar greanti G.P.Z. e-kerz kentañ c'hwec'hmiziad 1963 evit nann-pourvezadur pe nann-miradur an termenou dereiñ.

Anat eo e teu seurt reizhiad da vezañ diembregadus a-grenn gant doareoù arnevez ar greanterezh, pa gemer an emgefren ul lec'h bras-ouzh-bras bemdez, ha pa rank ar stlenn bezañ skoueriekaet ha hentet buan-ouzh-buan. En ur stad dornwezhel emañ ar reizhiad steuñviñ soviedel ha ret eo hec'h adaozañ.

b) Derannadur ar c'hevalaoù. Amañ e ranker diforc'hañ an daou rumm stlennadoù a zeu e kont : an arbennoù derannañ, e-keñver an amkanioù a fell d'ar steuñverion tizhout o tarbar ar steuñv (sl. Emsav 13/26); heboell e vo enta an arbennoù-se, mar disoc'h ar steuñv (lakaet e ve erounezet evel diferet, pezh a zo kudenn an titourennoù) gant an amkanioù dibabet; an titourennoù, anezho azonoù o verkañ ez eo erounezet sturiadoù ar steuñv (forzh petore amkan a ve dezhañ).

Ensellomp amplegadoù heboellded ar steuñviñ, hag ar riskloù diheboellded a zo gant ar reizhiad soviedel.

Heboellded an arbennoù-derannañ a ampleg :

- Kempoellded diabarzh ar steuñvoù. Benveg ar c'hempoellaat eo amañ ar ventel danvez a ro an tu da heuliañ ar c'hevalaoù en o roud a bazenn da bazenn. Si kentañ ar mentelioù danvez eo an diaes dastum an holl stlenn, hag ur stlenn heberzh, ret evit o derc'hel en o reizh. O eil si zo diabarzhel ha riñvoniell : lakaomp e ve ret kreskiñ danvezadur ar goulosk en ur bazenn eus ar steuñv; da heul e ranker derc'hel kont eus ur c'hresk e kenderc'h an dir, a ampleg d'e dro ur c'hresk all e kenderc'h ar goulosk. Evit degas ar ventel d'he c'hempouez e ranker oberata ur monedone jedadurel hir a-hed argerzh kenderc'h ar goulosk. Ergentaou c'hoazh ez erounezet ul lod hepken eus ar monedone-se hag e lezed an azlammoù diwezhañ nann-jedet da vont en arvoug ouzh ar staliadoù, pe e c'houlenned digant an embregerezhioù ur strivadenn ouzhpenn evit kompezañ ar forc'had. Dre eurvad, en deus LEONTIEF degaset an dezrannañ etrejinerezhel en U.R.S.S. ha war un dro un hentenn jedoniell - oc'h emplegañ arver ar riñverezed elektronek - evit diskoulmañ en un taol ar monedoneoù etregennadel.

- Bastañ da c'houlenn ar bevezerezh. Ar ret ma oa da ziorren an Unaniezh Soviedel zo bet arbenn ar pouez roet da genderc'hadur ar c'hevalaoù diwar-goust kenderc'hadur ar madoù-bevezifñ, ha n'eus aze digempoellded ebet. Diheboellderioù avat a c'hell c'hoarvezout e diabarzh gennañ ar bevezerezh : pe diheboellderioù meurgantel, pa renas div wech an naonegezh er vro; pe diheboellder korrgantel o tennañ d'an dic'houest ma'z eo ar steuñverion da savelañ ar c'henfeurioù madoù ha gwazadoù diouzh ezhommoù ar vevezerion : beuzet e voe ar marc'had dindan an togoù-kleuzeur, tra ma chom atav diaes kavout gwazadur ur c'here pe un dichaner skinweleriou.

- Heboellded an derannadurioù. Heboell e c'hell bezañ arbenn divizout un derannadur ha diheboell an doare ma'z eo kaset da benn an derannadur. Anavezet mat eo ar c'houfonerezh a ren en armerzh soviedel. Hervez KANTOROVITCH e ve tu, dre zegas hentennoù derannañ heboelloc'h, da greskiñ ar c'henderc'h greantel eus etre 30 ha 50 %. Skouerioù : dale U.R.S.S. oc'h erlec'hiañ ar metaloù amhouarnekozuzh an dir, astennadur an dourhentoù diwar-goust an tirhentoù, an dale o tiorren an ijinerezh kimiek (berrentez temzoù a voe betek 1963).

Penaos meizañ kemend-all a ziheboellderioù ? P.WILES a ro an displegadur-mañ : "Soviediz a zibab an titourennoù evit o fleustreg-ezh, hogen tennañ a reont o arbennoù-derannañ eus o ideologiezh (), ha houmañ a vir outo a welout ez eus ur gudenn e-keñver dibab" da ziskoulmañ ivez evit an arbennoù-derannañ end-eeun. Abaoe LENIN oc'h embann e oa "ar sokialouriezh galloud ar soviedoù mui an tredanadur", ez eo bet renet ar steuñverezh dre ziuz nt-ideologek un nebeut gennadoù lusker ha dre zeverañ diouto ent-kalvezel steuñvadur an holl re all. Roll an armerzhourion a vez enta kempenn ar reizhiad e doare ma chomfe kempoell, met priz seurt kempoellded diabarzh a vez alies un diheboellded koustus. Ar prizioù da skouer a vez jedet, n'eo ket a-geñver gant gwerzhioù gwerc'hel ar madoù (ar pezh o deus koustet a labour-kenderc'hañ da skouer), met hepken a-geñver gant amkanioù ar steuñv (prizioù gounezal izel-tre a-benn devoudañ ar postadurioù er greanterezh). Hogen an armerzhourion a zeu da verzout ez eus tach-ennoù n'o deus ket ar bolitikerion da gemer an divizoù warno anez kouezhañ en didelezh hag en dizurzh. "Da betra e talvez an armerzhourion, a skriv ar C'hel. CIK, Rener Ensavadur Armerzhouriezh Akademiezh ar Skiantoù eus Tchecoslovakia hag ezel eus Poellgor-Kreiz ar Strollad, ma n'int ket, dre an abeg-mañ-abeg, evit diskouez e koulz an daveadurioù dibar a c'houlenn kemmañ a-vras al leviadur armerzhel ha politikel, ha mar gellont hepken adlavarout a posteriori ha difenn ar pezh o deus blenierion ar Strollad Komunour dizoloet drezo o-unan ?".

k) Efedusted an titourennoù. Roll an titourennoù zo gwiriañ hag-eñ ez eo erounezet sturiadoù ar steuñv en amgant pep embregerezh. Mar'd

int efedus enta e tleont titourañ war-eeun berzh ar steuñv e-unan. Ent-devoud avat e titouront labour an embregerezhioù renet ha roet da anaout e seurt doare ma titourfent ur berzh-mat.

Gwelet hon eus penaos e teue a-benn an embregerion da c'holeiñ o barregezhioù, da defizoriañ an araezioù-kenderc'hañ na goustont netra hag a ya d'ober miradoù bepred talvoudus, da herzel ouzh an nevezadennoù, da genderc'hañ oberiadoù hervez lizher ar steuñv met ket hervez e spered eleze diouzh ezhommoù ar bevezerezh. An hevelep technoù a gaver e par ar sovnarç'hozioù.

An adreizhadurioù goulennet.

Dindan dri fenn rumm e c'haller renkañ an adreizhadurioù kinniget gant Soviediz o-unan : an atebegezhioù, an heboellded, an titourennoù.

a) An atebegezhioù a ve da vevennañ strishoc'h, a-benn delec'hiañ orin an urzhioù digempoell, pezh zo diaes er reizhiad evel m'emañ.

"Pa zic'hañs d'ur micherour terriñ ur pezh a ijinenn a goust ur roubel, e vez lakaet da giriek hag e rank dic'haouiñ. Met pa laka ur penn gwazva steuñverezh un toullad milionoù da steuziañ dre un disentez faziiek, ne glasker ket penn dezhañ, ken natur e hañval se bezañ" (16).

b) An heboellded dre ar riñverezh kreizennet, gant skoazell an araezioù arnevez, ar riñverezed elektronek pergen, zo kinniget evit diskoulmañ kudennoù ar steuñviñ. Meur a zamkaniezh ez eus avat.

Ar C'hel. FEDEROVITCH a rebech d'an arbennoù-derannañ bezañ troet e stlennadoù-oberata dre hentoù henstuzel; d'e veno, dre arverañ a-vras an ordinatorioù, e ve an ensavioù-kreiz e tro da savelañ steuñvoù peurrezis e furn ur reizhiad sturoniell oc'h ezvevennañ ar prizioù ha zoken, er pal, pep emell denel.

Diouzh o zu e kinnig ar jedonourion L.KANTOROVITCH ha V. NOVOZHILOV dedalvezañ hentenoù ar raklunierezh linennek da aozidigezh ar steuñv broadel, dre uc'hekaat amkanioù ar c'henderc'hañ e-keñver ar barregezhioù danvezadus, pe dre izekaat koust ar c'henderc'hañ evit amkanioù termenet. Ur gudenn a well-ekadur eo, ha diskoulmet e vez war un dro e termenoù fizikel (kementadoù kenderc'het) hag e termenoù moneizel (prizioù emplegat anvet "dewerzhadurioù ergorel" gant KANTOROVITCH). An hentenoù-mañ a ro an tu da arverañ nevidoù war ar paper, an nevidoù neuziek-se o tiskouez an hevelep perzhioù evit dinodadur ar prizioù hag an nevidoù gwerc'hek. Dav e ve neuze d'ar politikerion lezel gant

fenn (rumm)

delec'h

arbennoù

Veteran

Enchenn
1968

definity
adial
optimal

an armerzhourion an emell da verkañ prizioù ar madoù-kenderc'hañ ha da jediñ an dasparzhioù treugel a-benn bastañ d'ar goulenn disoc'hel er prizioù izelañ. Gant an aotrouniezh politikel e chomfe ar garg da ziferañ ar "goulenn" disoc'hel - kuit a c'hortoz e teufe ar "goulenn"-se digant ar vevezerion o-unan. "Kenderc'h-erezh hollel ar gevredigezh a vefe urzhiet evel hini ur greanti bras, hag aozet e ve ur steuñv gwellek evitañ evel just. E gerioù all, bevennoù an embregerezh a yafe e kenedgouezh gant bevennoù ar gevredigezh hec'h-unan" (KANTOROVITCH).

k) Gwelladur ar reizhiad annougoù. En enep d'an damkanourion diagent ez eo digreizennour E.LIBERMAN, kelenner en Ensavadur Armerzhouriezh Kharkov. Plediñ a ra nebeutoc'h gant an arbennoù murgantel eget gant an annougoù a c'hoari e par an embregerezhioù. Evelhenn e c'haller diverrañ damkaniezh LIBERMAN : ar steuñverion a lavar petra kenderc'hañ, an embregerion a ziviz penaos kenderc'hañ; eleze emañ e kefridi rener ar firm dibab e araezioù-kenderc'hañ, sinañ kevratoù pourvezadur war-eeun gant ar firmoù all. Jedet e ve an arc'hoproù diwar ar roubel kevala postet a-gevreizh gant an helv. Diferet e ve evit meur a vloaz ar reoladoù askorusted evit pep skourr eus ar greanterezh, pezh a dennfe diouzh an embregerion an aon da welout ar reoladoù-se uhelaet en o embregerezh da heul helvoù re vras.

Pep embregerezh a zegemerfe an arc'hopr leun evit an helv rak-zivizet gantañ, hag an hanter hepken eus an arc'hopr evit an dreisthelvoù. En doare-se ne ve ket ken ar pennembreger techet da c'holeiñ e varregezhioù, na da staliañ kevalaoù dreistezhomm, na da herzel ouzh an nevezadennoù.

Pour
2.000

N'eo ket diaes moarvat diverzout an tuioù gwan a chom e pep hini eus ar reizhiadoù kinniget. Hemañ da skouer e kinnigadennoù LIBERMAN : lavarout d'an embregerezhioù petra kenderc'hañ en ur lezel ganto an emell da zivizout penaos kenderc'hañ ne gav skoilh ebet e par ar c'henderc'herezh disoc'hel; met e par ar c'henderc'h-erezh treugel e teu ar "penaos" da vezañ ur "petra" evit ar firmoù pourvezer, ar pezh na c'hell ket klotañ gant pennaenn ar steuñviñ.

Lavaromp adarre n'o deus an adreizhadurioù kinniget netra eus un distro d'ar frankizouriezh kevalaour. Ober anv eus nevid, eus helv ne zle ket touellañ. An helv n'eo nemet un ditourenn e-touez ar re all ha nepred ur pal. An nevid a dalvez da arhentiñ an treugoù-kenderc'hañ, hogen ned eo nepred an arc'hwel bevedel ez eo en armerzhioù kevalaour.

A-du-rall e chom ar galloud politikel evezhiek-kenan ouzh perzhderioù ar madoù-beveziñ : damantiñ a ra da yec'hed ar spered hag ar c'horf muioc'h eget ne ra galloud politikel ebet e bro ebet, an damant-se a ranker anaout, zoken mar mirer ar gwir da zezvarn an dibab divezel a ren war an damant-se.

Un armerzh sokialour nevidek : Yougoslavia.

Pouezus eo studiañ reizhiad armerzhel Yougoslavia peogwir ez eus anezhi ur patrom nevez o kemmeskañ steuñverezh ha nevid.

E derou an emdroadur emañ torr politikel 1948 etre Yougoslavia hag U.R.S.S. ha, da heul, an dezvarn war ar pennaennoù soviedel. E 1946 e oa bet broadelet ar greantioù, ar bankoù, an dezougerezh, ar c'henwerzh a-vras hag a-vunut, ha staget, gorrek, da gengladekaat ar gounezerezh. Goude an torr e voe divizet kengladekaat dre redi, a-benn parraat ouzh berrentez an danvezioù bevañs, met paouezet e voe gant an hent-se e 1953 pa voe anat e oa ur c'hwitadenn, hag aotreet e voe ar c'hounideion da zilezel ar gennad kengladel, pezh a rejont holl pe dost.

Er greanterezh e voe divizet e 1950 reiñ d'ar c'hoskor ar berc'hentiez war an embregerezhioù. Gant ar c'hoskor e vez dilennet ur Poellgor fiziet ennañ amaezhierzh ar firm; gant ar Poellgor micherour-se hag ar strollelezh lec'hel (anvet "kumun") a-gevret e vez anvet ur rener. Azezet e vez ar mererezh war benn aenn an askorusted.

E spered e luskerion, e voe an tremen eus ar c'hevansteuñviñ d'ur reizhiad kemmesk un hent da dizhout dizeriadur ar Stad, - dic'hallus ma hañvale bezañ seurt dizeriadur keit ha ma padfe kreizennerezh groñs an armerzh. N'eo ket sur e klot seurt meno gant kelennadurezh MARX, a ziauele dreist-holl dizeriadur ar Stad evel benveg destrizherezh politikel, ha n'eo ket evel ar gevredigezh o'n em urzhiañ hag o ren kenderc'h ha dasparzh hervez unvennoud an holl hag o savelañ "amaezhierzh an traoù" (ENGELS). Bezet pe vezet, seurt dave da gelennadurezh MARX a oa pouezus forzh penaos rak, o vezañ ma amlege dre ret an emvererezh micherour un distro da arver an nevid, e oa ret pellaat an tamall a "azgwelouriezh" a vez bepred un dismegañs vras er bed komunour.

Dezvad ar firm yougoslaviat

Pep embregerezh zo perc'hentiez e goskor a-bezh a zileur o galloud d'ur Poellgor micherour dilennet, karget da ziferañ dasparzh an helv ha da ehvel, a-gevret gant pennadurezhioù ar gumun, ar rener

embregerezh, hemañ o vezañ "galloud-erounit" ar firm.

Ar vicherourion ne vezont ket sellet evel gopridi. Emañ kevuziad pep hini a-geñver gant al labour en deus roet; kevreizh eo enta ar c'horvoderioù da vuzadoù an embregerezh. Dasparzh ar buzadoù a vez graet gant ar Poellgor micherour e-unan, a zilam diouto an dispignoù, an ardaladurioù, an telloù hag a rann an dilerc'h etre kevuziatur ar c'hoskor hag ar postadurioù.

Pere eo gwirioù ha dleadoù an embregerezh e-keñver ar strollel-
ezh vroadel ? Hervez ar pennaennoù diazezet e 1950 emañ e galloud ar rener divizout leviadur an embregerezh evit a sell ouzh ar c'henderc'hañ, ar prizioù, ar pourvezadurioù, ar goprou, an dud-labour, ar gwerzhadurioù. N'eo ket aotreet ar steuñverion, eleze ar Stad, da enderc'hel ar firm gant amkanioù, hag al leviadurezh armerzhel a-berzh Stad a zle bezañ renet hevelep ma kloto ercunvezadur ar steuñv gant brasañ askorusted an embregerezhioù.

Ar steuñv broadel hag an embregerezhioù

E berr e c'haller luniañ an doare ma'z eo reoliataet an armerzh yougoslaviat evel ar yevadur etre div elfenn : a) an diferadur gant ar galloud stadel "e-maez nevid" eus sammad hollel ar postadurioù b) an arhentadur gant nerzhioù an nevid (c'hoari frank ar prizioù, uc'hekaat an helv) eus ar c'henderc'hadur boutin hag ar bevezadur; ar postadurioù hiniennel o vezañ savlec'hiet etre daou.

a) Sammad hollel ar postadurioù, - hag an arboell ouzh o amparañ, - a vez erverket gant ar steuñv broadel, a-gevreizh gant an ezhommoù broadel a gevalaoù ha gant an amkanioù kreskidigezh ha gwelladur kevredigezhel. E-maez nevid e vez didermenet ar sammad-se peogwir e vez jedet diwar ar steuñv. Amparet e vez an arboell diwar emarc'hanterezh ar firmoù, prestoù a-berzh ar brevezidi, kemedoù (17) diseurt, hag ivez diwar ar buzadoù, - ur rann anezho o vezañ enlenet ent-dezvel ouzh an ardaladurioù hag ar miradoù.

b) Dasparzh an arboell danvezadus etre ar postadurioù gallus a vez

graet hervez ur reizhiad kemplezh-tre. Aotreet eo an embregerezhioù da arc'hantañ un drederenn hepken eus o fostadurioù, an div drederenn all o vezañ arc'hantet gant ar gennad bankel Stad. Diouzh he zu, e c'hell ar Stad dibab etre ar firmoù goulenner diouzh ur stroll azonou evel an askorusted, stabilded an embregerezh, hag arbennoù hollekoc'h evel diorreidigezh ar ranndirioù dibourvez.

k) Ur wech ar postadurioù kaset da benn, emañ korvoerezh ar c'hev-
alaoù kozh ha nevez dindan atebegzh an embregerion a zle ren o stal en doare da uc'hekaat an disoc'hoù. Ar goulenn a-berzh an tiadoù o vezañ frank, ez eo warnañ eo'h en em soliont evit leviañ ar c'henderc'herezh. Hogen, dres evel en armerzhioù nevidek Kornog, ez eo reolet gwikefre an nevid gant emelloù liesseurt : reolerezh an eskemoù pa sav diaesterioù gant ar ventel-dalañ; taos war ar c'hengreadur dezhañ ur feur tregemmat (kalz stabiloc'h evelkent eget e geveleb soviedel) a zo e bal, ouzhpenn amparañ kemedoù, eeunañ an nevid evit an danvezioù rouez pe er c'hontrol reñveradek; merkadur un usvevenn d'ar prizioù a-benn derc'hel kerreizh ar firmoù unwerzher; palvatadur ar prizioù gounezal a-benn broudañ ha reterañ ar c'henderc'h, h.a.

- (1) Annouezh v. annouget, broudañ, atizañ, kentraouiñ; annoug g., broudadur, atizadenn.
- (2) Kellid g., an arc'hant evel perc'hentiezh, barregezh, danvez postadur, danvez telloù, h.a.
- (3) Evit aesaat an displegadur hon eus miret amañ evit envel ar ar poellgorioù armerzhel rannbarzhel an termen sovnarc'hoz daoust ma ne vez ket arveret ken en U.R.S.S. abaoe 1965.
- (4) Dazrummañ v., dasparzhañ etre rummoù; lakaat a-gevret an elfennoù eus un teskad a zo dezho ur perzh boutin; pa genderc'her, kenderc'hañ traezoù eus meur a rumm; dazrummadur g., an dazrummañ evel ober pe an disoc'h anezhañ.
- (5) Reolad b., hollad an doareoù skoueriekaet (termenet spis ha kemeret da skouer) a zle bezañ re un ober pe disoc'h an ober-se.
- (6) Uc'hek ag., db. ur werzhad, ar vrasañ etre reoù all beziat pe vezus, sk.: gwrezverk uc'hek an devezh; izek ag., db. ur werzhad, ar vihanañ etre reoù all beziat pe vezus; gwellek ag., db.

un degouezh, un disoc'h, h.a., ar gwellañ etre reoù all beziat pe vezus; uc'hekaat, izekaat, gwellekaat v., degas d'ar par uc'hek, izek, gwellek, sk.: uc'hekaat ar buzadoù, izekaat an dispignoù, gwellekaat an dasparzhioù.

- (7) Amgant g., dalc'had bevennoù ur veli, ur gwazadur, h.a., sk.: kret eo ar penn gwazva evit kement labour graet en amgant e wazva.
- (8) Muiaat v., kas ur c'hementad, pe ar c'hementadoù a zo en udb., d'ur werzhad vrasoc'h, sk.: muiaat ar steuñv zo lakaat sifroù brasoc'h e-lec'h ar sifroù merket da gentañ; leiaat v., kas ur c'hementad, pe ar c'hementadoù a zo en udb., d'ur werzhad vihanoc'h.
- (9) Koul g., torridigezh-lezenn, prl. grevus.
- (10) Tarwazañ v., drougarverañ ur garg, tennañ korvo anezhi enep lezenn; tarwazer g., neb o tarwazañ; tarwazerezh g., embreg an tarwazañ.
- (11) Trevvac'h b., harlu en ul lec'h termenet; lec'h ma harluer en doare-se; ar c'hastiz e-unan ez eo seurt harluadur; trevvac'hañ v., kas ub. d'an drevvac'h.
- (12) Kosp b., anv-rumm evit kement kastiz a-berzh lezenn.
- (13) Stael g., savlec'h en ur reizhiad, en ur framm; lec'h labour en un embregerezh, en un amaezhiadur.
- (14) Mulgul g., digresk obererezh (da heul diouer un danvez da sk.) en ur poent eus an treug-kenderc'hañ, o tevoudañ digreskoù all ha strafuilhoù en ardraoñ dezhañ; damheñvelster : difonnenn.
- (15) Daouvac'had g., termen a jedoniezh, lièsad un niver drezañ e-unan, sk.: 16 zo daouvac'had 4.
- (16) Ekonomitcheskaya Gazeta, 19 01 63.
- (17) Kemediñ v., tennañ arc'hant evel taos, tell, h.a.; kemed g., an arc'hant tennet en doare-se.

